

KANNAOIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 83 Here-Du-Kerzu 2013 Priz : 3€

Ar Bonedoù-Ruz hag hon Emsav

Kalz a draoù a zo bet lavaret ha skrivet diwar-benn Emsav ar Bonedoù-Ruz nevez maz eo Christian Troadec, maer Karaez, unan eus ar c'hezeg-blein pennañ, un den en deus diskouezet bezañ mennet da vodañ ar Vretoned evit gounid muioc'h a frankiz da Vreizh.

Anat eo ez eo en em savet an dud en abeg d'an dilabour ha dre m'emañ o kreskiñ dizehan evel ur c'hrign-bev : Stal Salmoned Poullaouen, lazhti moc'h Lambaol-Wimilio Gad SAS, hag e gennad ar c'hig-yar : Tilly Sabco en arvar evel Doux Kastellin.

Miliadoù a bostoù labour, hag e ranker kontañ ouzhpenn an niver uhel a iskevrateerion, a artizaned hag a servijoù a zo lakaet diaes o oberiantizoù. War un dachenn all, merzet e vo dizale priz an tiez o tigreskiñ en toleadoù e-lec'h ma vez serret al labouradegoù. Da skouer e c'hellor gwelout tud kozh a glasko gwerzhañ o zi - frouezh labour o buhez - da

baeañ ti ar re-gozh, na zeuint ket a-benn hep krennañ a galz ar priz o defe goulennet bloaz 'zo. Alies e weler ivez koubladoù a labour en hevelep labouradeg hag a goll o labour o daou. Unan anezho a anavezan, dres a-walc'h, hag hi dougerez. Aet eo nevez 'zo da servij amiegezh he c'hlinikenn ha dre ziv wech eo bet kinniget dezhi... diforc'hañ ! *"N'emaoc'h ket o vont d'e virout alato !"* ha komzoù divalav a seurt se. Evel-se emañ tro-spered un darn vras eus an dud hiviziken.

Prometet e oa bet d'ar Vretoned e tegasfe savidigezh Unvaniezh Europa ar binvidigezh e-barzh ar Vro. Kazeg ! Breizh a zo ar rannbarzh nemetañ e Frañs en doa mouezhiet a-du gant Feuremglev Maastricht e 2005. Moarvat e oa dleet se ivez d'ur background

kristen a zo troet d'an esperañs ha n'eo ket da fallgaloniñ gant reuzioù ar vuhez. Fiziout a rae ar Vretoned en Europa. Bremañ, avat, e welont ez eo ar vedelouriezh arloupet-se penn-kaoz d'an dilabour ha d'an enkadenn armerzhel. Anavezout a ran ur paotr yaouank eus Landivizio a oa aet d'an Alamagn e derou ar bloaz hag a gavas labour en ul lazhti-moc'h, hag a veze paeet 3,8 euro an eurvezh. Labourat a rae gant tud eus broioù reter-Europa e-lec'h ez eo izeloc'h ar goprou isañ hervez lezenn teir gwech izeloc'h hag ouzhpenn eget e Frañs, hag en Alamagn n'eus ket a c'hopr isañ. Ur bugel seizh vloaz a

gompen diouzhtu ne c'heller ket harpañ ouzh un digempouez a seurt-se e kargoù hon embregerezhioù. 750.000 pemoc'h a Vreizh a zo bet kaset da Alamagn da vezañ lazhet e 2012, da lavarout eo 11 sizhunvezhiad labour e Lambaol-Wimilio, ha lod, ur wech lazhet, a zo bet pourchaset da stalioù 'zo a charkuterezh e... Breizh !



Sur a-walc'h ez eo bet an dave zo bet graet ouzh emsavadeg ar Bonedoù Ruz un taol kaer a-berzh aozerion al luskad-mañ. Da vihanañ ez eo bet klevet dre holl e Frañs hag er bed ez eus c'hoazh un emsav bennak e Breizh. Evel e 1675 e klemmomp ouzh kresk an tailhoù. Gant an Eko-taos e teu a-benn ar Stad C'hall da lakaat gwirioù-treizh war hentoù Breizh, un dell a oa bet espernet dimp gant Anna Vreizh, sañset, hogen er pleustr gant un aozadur emsavel : ar CELIB er bloavezhioù 60. Aze e weler roll naturel an Emsav : gwareziñ ar Vretoned diouzh galloud Pariz. Setu aze perak eo a-bouez klemm ivez ouzh aozadur kreizennet ar riezstad c'hall, a vir ouzhimp mestroniañ diorreadur armerzhel hol ledenez.

Enebiezh ar c'hweluniadoù ha tri c'helenner skolveur a zo bet ivez. Gwelet eo bet ar c'hweluniadoù o klask dispenn emsav ar Bonedoù-ruz. Ar wask c'hall a reas stad outo daoust ma oa pemp gwech bihanoc'h niver an dud bodet e Karaez d'an 23 a viz Du eget e Kemper d'an hevelep deiz. Gwashoc'h c'hoazh – ha mezhus – eo bet emell tri c'helenner eus Skol-Veur ar Stad c'hall e Brest, Alain Croix en o zouez, a embannas un «Taol-pluenn» e pemdeziegoù ar vro a-enep da Christian Troadec, war an abeg-toull ma “*ne c'heller ket keñveriañ gant an degouezhioù e 1675*”. Respont a c'heller dezho ez eo groz o emzalc'h a ziskouez dreist-holl ez int gwerzhet d'an hini a c'hopr anezho. A-viskoazh ez eo bet Skol-Veur Vrest anaoudek bras ouzh he mestr. O arguzenn bennañ a zo diskleriañ e oa emsavdeg 1675 un emsavdeg kouerion tra ma oa unanet ar Vretoned e Kemper :

patroned (Troadeg a zo penn-embregerezh,

“Produit en Bretagne” en deus diskouezet startijenn vras en afer ivez), artizaned, gounezerion, micherourion, retredidi, familhoù hag all hag all. Kement-se ne glot ket gant o sell war ar bed, a rank bezañ displeget dre ret gant “stourm ar renkadoù”.

Digomprenadus a-grenn eo emsav ar Bonedoù Ruz 2013 evit ar skolveuridi hag evit ar wask eta. Ne gomprenont ket e chom c'hoazh e Breizh un emskiant broadel bennak, un emskiant a gumuniezh liammet da vihanañ-holl gant lazoù armerzhel a zo da zifenn a-enep ar Bed : a-enep Brusel, a-enep Pariz, met n'eo ket a-enep ar Batroned, pezh a zisplij kenañ d'ar c'hweluniadoù evel-just dre maz eo int a zo o roll renkañ ar c'hudennoù armerzhel o varc'hata gant ar Batroned fallakr. Kalz a dud a wel mat ne zifenn ket mui ar c'hweluniadoù lazoù al “labourerion”, dreist-holl pa vezer gant ur gouarnamant a gleiz. Melenchon e-unan en deus kunujennet ar Vretoned bezañ “Sklaved” ha “Loñseged” !!

Er pleustr, den ne oar penaos ez echuo al luskad-se. En amzer dremenet e ouzer penaos ez eo bet diorreet armerzh Breizh en desped d'ar Stad C'hall a zo bet a-viskoazh troet ouzh ar Reter. Amañ e Breizh ez eo ar Vretoned o-unan o deus diorreet o armerzh, daoust d'an diouer a gevalaourion, ma lakaer degouezh Bolloré a gostez, a zo eus un tiegezh greanterion a gozh eus an Erge-Vras². Skouerioù e-leizh ez eus : ur

¹ Loñseg : *nigaud*

² Lenn “Trec'h ar Garantez” gant Brogarour, ur romantig nevez adembannet, a c'hoarvez e metou labouradeg an tiegezh Bolloré.

pennad war-se am boa skrivet³ er c'hannadig. N'eo ket troet Bonedoù Ruz 2013 da “skeiñ war ar batroned”, dreist-holl pa ouzont ez int nebeut ha n'int ket pinvidik-mor e gwirionez. Ha gwelloc'h eo kaout afer ouzh ur patron breizhat kentoc'h eget ouzh tud diwrienn a ya hag a zeu a embregerezh da embregerezh, broudet hepken gant o redad-micher. Ar chañs o doa c'hoazh tud Doux pe Leclerc da c'hellout kejañ gant o fatron en o buhez pemdez, ha n'eo ket gant tud dizanv kaset gant bankoù a ziavaezbro. Skouer Charles Doux a zo mat da venegiñ : fazioù en deus graet o klask diorren e embregerezh ha dont da vezañ an embregerezh-bed brasañ evit ar yer, dre breñañ adstaliou e Suamerika. Dre m'en deus kroget diwar netra n'en doa ket berniet arc'hant awalc'h evit ober ar c'hresk-se ha dre se en deus amprestet hag ez eo en em gavet dic'houest da resteurel. Ti Gad Lambaol a zo en hevelep degouezh : re nebeut a gevalaou a zo gant ar c'hevranour pennañ, ar gevelouri CECAB, he deus sammet dleoù dreist-kont da breñañ ti Gad.



Ret e vo d'ar Bonedoù-Ruz ober hent a-benn kompren e rankont treiñ kein d'an UMPS a zo bepred gwerzhet d'an Doueez Europa, daoust

m'emañ o tebriñ he bugale. Ha da heul e rankint treiñ kein ouzh ar vedelouriezh dre vras, da zilezel “stourm ar renkadoù” ha distreiñ d'an hennadelezhioù⁴ a ra d'ar renkadoù bevañ a-gevret, ha da ren ar gwir stourm : a-enep an “*uper-class*” a zo deuet a-benn da bennaskañ⁵ penn-da-benn hon armerzh e Kornogeuropa, ha da ober ouzhimp evel ouzh bugale gant lezennoù “sokial” ha kealiadurezhel diniver a zistag ac'hanomp gwech gant soutilded, gwech gant feulster, diouzh ar sevenadurezh a zo devoudet gant ar Gristeniezh : an ensavadurioù a wareze an den e pep live ar gevredigezh (tiegezh, Iliz ha broad) a zo en arvar da vat, hep kontañ an amvevad (Fukushima...). Pa 'z eus anv gant degouezh ar Bonedoù-Ruz eus ar Bouedc'hreanterezh dreist-holl, ez eo sklaer ez eo bet broudet kenañ ar Vretoned da vont war hent ar c'henderc'hañ divuzul, kuit da saotrañ an endro ha da aberzhañ pinvidigezhioù ar c'hondon (o tommañ tiez-gwer tomatez SAV-EOL da skouer...). Pep tra a zo da ijinañ en-dro eta, hogen ma c'hoarvezfe

³ Niv. 42 ar C'hannadig : Notennoù war un danvez armerzhouriezh vreizhek (Francheville, Loeiz XIII, Youenn Olier, Enez Ar Vertuz, BALB, CMB, Mutouest, Coop Breizh...)

⁴ Hennadelezh : *identité*.

⁵ Pennaskañ : *entraver*.

ganimp e Breizh a-drugarez da spered brogarour ar Bodedoù-Ruz divizout a-gevret amzer da zont hor bro, klask a-gevret ha kas da benn diskoulmoù bastus evit hol ledenez, ne vo ket bet aner ar birvilh a c'hoarvez er sizhuniou-mañ. E skoaz re 1675 n'o deus difoupet war netra e c'hell re 2013 bezañ e derou un adsav armerzhel a vo ret-mat kas da benn dre holl er bed : ma vevfe an holl dud war ar blanedenn evel er Stadoù-unanet e vefe ezhomm eus 20 planedenn bennak !

Ur ger bihan bremañ diwar-benn emzalc'h ar Bodedoù-Ruz p'o doa un nebeut Parizianed "a-zehou", difeuls a-grenn, kemeret luc'hskeudennoù anezho-o-unan en-dro da golonenn leurgêr ar Bastille e gevred Pariz da ziskouez o c'hengred gant ar Vretoned emsavet ha dre vras gant an dud niverus-tre na c'houzañvont mui Hollande a zo degouezhet izel-spontus er sontadurioù : 15 %. Ivez, re all gwisket ganto ur boned ruz evit lidoù an 11 a viz Du er Champs Elysée. Diouzhtu e oa bet diskleriet ne zegemere ket ar Bodedoù-Ruz an dud eus an "Tu dehou pellañ", hep dezho merzout – me 'laka – ez eus kalz a dud e Breizh evel e Frañs o deus mennozhioù na vezont difennet nemet gant ar strollad broadelour gall-se : an disfiz ouzh Europa, gwareziñ an embregerezhioù diouzh "dumping" an estrenvro, en em virout diouzh an enbroerezh-poblañ pa n'eus ket mui a enbroerezh-labourat⁶. Ar mennozhioù-se a gavan reizhpoell-tre hogen o embann a dalvez bezañ kendaonet gant ar *politically correct*, ha Troadec n'eo ket bet e tailh da chom hep kouezhañ en traped-se. Ar c'hannad Marc Le Fur, eus an UMP, difenner ar bouedc'hreanterezh a-hent-all, pergen e afer ar bezhin glas, a oa e Kemper ivez, n'emañ ket en tu kleiz, anat eo. Sur a-walc'h e vo diaes d'an holl sevel a-du gant ur raktres diorren nevez. Ret e vo evelkent da Troadec mont dreist d'ar *politically correct* ha labourat gant an holl ma fell dezhañ unaniñ an holl Vretoned dindan e vanniel. Soñjal a ra din ne vanko ket al luskad-se d'ober fazioù, forzh penaos, hogen – sed ar pezh a lavaran d'am gwreg a-wechoù, pa vez un disentez da gemer gant ur riskl bras da faziañ – "Marteze e faziimp, met

⁶ Ul lenner a skriv din un dra a n'anavezen ket : Lazhdi Koadlineg (Collinée) en Aodoù-an-Arvor, en deus lakaet da zont tiegezhioù eus ar Mali evit labourat en e embregerezh, war zigarez ne gave ket koskor a-walc'h war al lec'h. Ur restadenn skinwel a oa bet bloaz 'zo pe muioc'h, hag a ziskoueze an dud-se evel enframmet mat er boblañs lec'hel daoust ma oant Muslimiz. Setu unan eus diac'hinadoù ar vedelidigezh : Breizhiz o koll o labour e Breizh en abeg d'ar vedelidigezh, hogen Afrikiz o kavout labour e Breizh en abeg d'an hevelep bedelidigezh-se.

da vihanañ hor bezo faziet a-gevret". Gant bolontez a-hent-all e teuer a-benn eus kalz traoù.

EAT en deus embannet ur gemennadenn a c'halv d'an unaniezh eta, ha da vihanañ an unaniezh a-enep Hollande hag e c'houarnamant a ya a-dizh a-benn ur voger-greñv a ziskaro Bro-Frañs ha Breizh da heul paz eo stag hor c'harr outi. Tu ez eus da rakwelout enkadennoù a-bep seurt er mizioù o tont hep gouzout a be du e teuo ar Reuz bras a seblant didec'hus a-benn bremañ siwazh. Ouzhpenn un enkadenn armerzhel a c'hell dont. 2013 a vo bet bloavezh diskeladegoù na oant ket bet gwelet ken bras ha ken alies biskoazh betek-henn. Milionoù a dud. Rakwelout a reer c'hoazh diskeladegoù dreist-goñvor a seurt-se e derou 2014. Gant ar c'hweluniadoù. Gant al luskad pro-life ha LMPT. Gant ar Bodedoù Ruz. Lod a ziskelo en holl ziskeladegoù-se, ha mat e vo henn ober e brezhoneg evel-just. Ni zo ni tud libr pa savomp hor Banniel er vann da lavarout hor soñj. Hogen Hollande a ra din soñjal en ur c'hozh Houad ma tever an dour-glav war e bluñv hep bezañ nec'het tamm : derc'hel a ra gant e hent, hag evel bep tro ma vez dic'halloud ur gouarnamant war boent an armerzh, e laka da votiñ lezennoù "sokial" (diskar an Tiegezh, an helazherezh, ar PMA/GPA dizale, jahinerezh ar c'hrouelloù-tud bet mouezhiet e-pad an hañv...) e-leizh, keit ha m'emañ c'hoazh ar galloud gantañ. Mall 'zo warno, rak gouzout a reont dija o deus kollet diwar-vremañ.

Evidomp-ni tiegezhioù katoliked vrezhonegerion ha n'int ket bet islonket c'hoazh, ha dre vuzhud, e kav din ne c'hellomp ket gortoz digant ar politikerezh pezh ne c'hell ket reiñ deomp. Ur brezel eo, ha Kalloc'h a lavare "Lous eo ar Brezel". Arabat eo gortoz ar Baradoz war an douar eta. Emañ dija hor penn en neñvoù : saveteet omp ! Kentoc'h eget koll kalz a nerzh er politikerezh – met mat eo kemer ur perzh bennak evel-just ! –, ez eo war an dachenn sevenadurel eo e rankomp oberiañ. Kempenn hor c'hevredigezh hag ar peurrest a zeuio da heul. Kement-se a zo c'hoarvezet en Indez da skouer. Ret eo chom spiswel dirak doare an traoù diouzh un tu, ha diouzh an tu all oberiañ el lec'h m'emaomp, gant an tammig frankiz hon eus, da ober eus hon tiegezhioù pep a greñvlec'h-bevañ ha stummañ evit chom pezh ez omp, ha gwiadiñ darempredoù etre hon tiegezhioù, a zo melloù diazez ar gevredigezh vrezhonek a zo da adkrouiñ penn-da-benn.

T. Gwilhmod

"Ar Rannoù" kevrinusañ gwerz ar Barzhaz Breizh

Kement Breizhad 'zo lennet gantañ Barzhaz Breizh ne c'hell ket chom diseblant goude bezañ lennet gwerz kentañ oberenn vrudet Kervarker, da lavarout

eo "Ar Rannoù", rak kevrinus-tre eo ar gwerz-mañ.

Evit Kervarker e oa un c'hendiviz skoliourek⁷ etre un drouiz hag ur bugel o teskiñ. Derc'hel a ra un doare dezastum, e daouzek goulenn ha daouzek respont, eus ar gelennadurezh drouizel war an tonkad, an alveztarzhiezh⁸, an douaroniezh, an amzeroniezh, ar steredoniezh, an hudouriezh, ar vezekniezh, an treuzenevadur⁹; goulenn a ra ar skoliad ouzh ar mestr da ganañ dezhañ steudad an niveroù, adalek unan betek daouzek, a-benn ma vefent desket gantañ.

Bez' ez eus re a venegoù o tennañ da varead mojennel Breizh er werz-se evit ma ne vefe ket un tamm gwirionez gant Kervarker : “*Teir rouantelezh Varzhin*”, “*Pevar maen-higolin da Varzhin*”, “*C’hwec’h louzaouenn er perig (kaoter), meskañ ar gaoter a ra ar c’horrig (Gwion), en e genou e vizig*”, “*ar wiz hag he nav porc’hell, ar wezenn-aval, an hoc’h kozh*”, “*Unnek beleg houarnezet, o tonet eus a Wened, gant o c’hlezeier torret, prenn kelvez da vazh loaek (koad-kelvez : argel ar faezhidigezh)*”. Hemañ diwezhañ avat a c’hell bezañ istorel hag a rafe dave da faezhidigezh ar Wenediz gant Kaezar.

Tud ‘zo na voent ket a-du gant tezennoù Kervarker embannet en e Varzhaz Breizh, evel Fañch an Uhel en e amzer, ha tostoc’h ouzomp Francis Gourvil, enebet-krenn outañ, a embannas un dezenn, 600 pajenn enni e 1960, evit diskar labour Kervarker, en ur lavarout e oa bet fardet gantañ un darn vat eus an tebet kanaouennoù-pobl bet dastumet gantañ. Evurusamant ez eo bet adkavet gant ar Mestr-enklasker Donatien Laurent, eus Skol-veur Brest, karnedoù dastum Kervarker e levraoueg e vaner kozh, ha gallet en deus evel-se prouiñ, en e levr “*Aux sources du Barzaz Breiz – La mémoire d’un peuple*, ArMen, 1989, ne oa ket Kervarker ur falser.

Emañ Preder o paouez adembann “*En ur lenn Barzhaz Breizh*” gant Fañch Elies-Abeozen, maz adkaver ennañ notennoù prientiñ ar c’hentelioù lizheregouriezh a roas Abeozen war ar Barzhaz Breizh e Skol-Uhel Emil Ernod Roazhon e 1941. Da zanvez al levr n’eus nemet 16 kanaouenn diwar ar 56 a ya da ober lodenn gentañ ar Barzhaz Breizh, ha siwazh n’eo ket bet studiet e-barzh “*Ar Rannoù*”, hogen, er bajenn 210 e ro Abeozen un titour deurus; ober a ra meneg en devoa klevet digant Maodez Glanndour meur a dra iskis diwar-benn “*Ar Rannoù*”, hag e oa bet embannet an traoù-se en ur pennad eus “*Barr-Heol*”, niv. 28, Gwengolo 1961.

Adkavet em eus an niverenn gozh-se a-drugarez da Baol Kalvez, hag enni ar pennad talbennet : “*En-dro da dezenn Fañch Gourvil, Lealded an Uhel ???*”. E 1955 en devoa gallet Maodez Glanndour tapout “*Ar Rannoù*” lezanvet gant ar bobl “*Gousperoù ar raned*”, gant ur sonenroller digant un den anvet Denez ar Gwenn eus ar C’hozh-Varc’had. Daou

vloaz a-raok, e 1953 e Ploubêr, en doa klevet anezhi kanet gant Soaz an Digerc’her dirak un Tantad Sant Yann. Aterset gantañ, e lavaras Soaz dezhañ ne gompren ket pezh a gane, bet desket ganti e-yaouank digant he mamm, a gane hi ivez ur wech ar bloaz dirak an Tantad. Evit Soaz ne oa tamm ebet “*ar Gousperoù*” ur farserezh met, en-diac’hin, un doare-pedenn; hag o c’houlenñ muioc’h outi, eme Maodez Glanndour “em eus gwelet e krede e oa latin, peogwir e oa digomprenadus evel pedennoù ar veleion”. Diouzh ar mennozh-se, ar bedenn, ez eo marteze perak eo bet anvet ar werz “*Gousperoù*”, hogen, evit pezh a sell ouzh “*ar raned*”, ne vez kavet neblec’h e testennoù an eilstummoù¹⁰ a zo ganin : hini ar Barzhaz, hini Maodez Glanndour embannet en e bennad, hag hini Loeiz Ropars skrivet war golo ur bladenn “*Rimodell ha Kanaouenn*” embannet gantañ tro-dro 1985, e vefe anv eus “*raned*” (grenouilles) e hini ebet anezho. En amrizh troidigezhioù gallek eus ar werz e kaver ar gerioù “*ran*”, “*rann*”, “*ranig*”, troet : “*fragment*”, “*série des nombres*”, “*partie*”, pezh n’en deus ket miret ouzh F. Gourvil, eme M. Glanndour, da dreñ ar werzenn : “*Kaerañ rannik a gement ouzout-te*” dre “*La plus petite grenouille que tu saches !*” o tiskouez evel-se n’eo “*ar Gousperoù*” nemet “*un assemblage de phrases vides de sens ou des coqs à l’âne à rimes riches*”, pe evel F. an Uhel : “ur c’hoari gerioù, un diduell savet gant rimoù pinvidik evit embreger eñvor ha teod da sabatuiñ ar vugale”, peogwir en deus embannet ar “*Gousperoù*” e-touez ar c’hanaouennoù-bugale. Evit klozañ an tabut e tegas Maodez Glanndour un arguzenn a-bouez : e holl eilstummoù ar “*Gousperoù*” ez eo gourel ar ger “*ran*”, “*rann*”, “*ranig*” : “*daou rann*”, “*tri rann*”, “*pevar rann*”. Paz eo benel ar ger “*ran*” (grenouille) e vije bet neuze : “*div ran*”, “*teir ran*”, “*peder ran*”...

Evit bezañ reizh ez eo ret anzav memestra ez eus eilstummoù “*ar Gousperoù*” maz eo bet kollet pozioù ‘zo pe a oa deuet da vezañ digomprenadus evit ar vrezhonegerion a-vremañ, hag a zo bet amsavet ar pozioù-se gant pozioù ijinet gant ar ganerion, evel da skouer e eilstumm tad-kozh Loeiz Ropars : “*Pevar deus ar c’hleier / o tisput deus ul luter*” pe “*eizh karr nevez / tistroiñ deus ar Vourc’h Nevez / Karget a vein nevez*”; En eilstumm dastumet gant Maodez Glanndour : “*Tri biz arc’hant da Vari / Tremen hep lavar din / Perc’henn outo mamm Herri*”. Pismigerion evel Fañch an Uhel ha Francis Gourvil o dije gallet diskouez aze n’en doa an dra-se netra da welout gant ur gelennadurezh drouizel, hogen frammadur drouizek ar ganaouenn a chome forzh penaos.

Ar brouenn wellañ eus orin drouizel ar werz a zo bet roet marteze gant an Iliz he deus eilet frammadurezh ar Rannoù evit he c’helennadurezh dezhi, hervez

⁷ Skoliourek : *pédagogique*.

⁸ Alveztarzhiezh : *cosmogonie*.

⁹ Treuzenevadur : *métempsychose*.

¹⁰ Eilstumm : *version*.

kemennadurezh ar Pab St Gregor-Meur a c'houlenne ouzh e gimingaded mirout pezh a oa mat er relijionoù pagan hag o c'hristenaat e-lec'h o tistrujañ. Kavet mat eo bet gant an Iliz frammadurezh ar Rannoù evit kelenn he gwirionezioù dezhi. Kervarker a verk en e notennoù war ar werz ez eus un diac'hin¹¹ latin ha kristen d'ar Rannoù, kavet gantañ en un dastumad kantikoù brezhonek eus ar Grenn-Amzer, bet adembannet e 1650 gant Tangi Gwegen, beleg. Bez' e veze kanet c'hoazh, un nebeut bloavezhioù 'zo, eme Kervarker, e kloerdi Kemper. Embann a ra un eilskrid roet dezhañ gant an Tad Henry, setu un nebeut pozioù : “- Dic mihi quid unus ? / - Unus est Deus / Qui regat in caelis / - Dic mihi quid duo ? / - Duo sunt testamenta / Unus est Deus / Qui regat in Caelis / -- Dic mihi quid sunt tres / - Tres sunt tres patriarchae / Duo testamenta / Unus est Deus / Qui regat in caelis /... evel-se e vez dibunet betek an daouzekvet : “ar pevar avielour, ar pemp levr Moïzez, ar c'hwec'h kibell en eured Kana, ar seizh sakramant, an eizh gwenvidigezh, an nav kor aeled, an dek gourc'hemenn Doue, an unnek steredenn a weladennas Jozef, ha da ziwezhañ, an daouzek abostol. Un dilerc'h eus an dra-se a c'hellfe bezañ kavet en ur ganaouenn-bugale e galleg, ma kaner enni “*Savez-vous ce qu'il y a deux ? / Y'a deux testaments / L'ancien et le nouveau / et oh, oh, oh / N'y'a qu'un cheveux sur la tête à Matthieu / N'y'a qu'une dent dans la mâchoire à Jean*, (Mazhev ha Yann an ebestel). Souezhet on bet gant pezh em eus kavet war ar genroued, ne vije ket bet ur ganaouenn-bugale da gentañ-penn, peogwir e vije bet savet gant ur c'haner “*comic-troupier*” : anvet Ouvrard, hogen ar paotr-se en deus gellet sevel e ganaouenn diwar unan kalz koshoc'h, evel en deus graet ur c'haner gall all, tostoc'h ouzhomp, anvet Polnareff.

Pelloc'h eget se e vez kavet levezon ar Rannoù. Daou vloaz 'zo da eured va mab e Roskov e oa bet pedet da zont izili Kelc'h Keltiek Montroulez peogwir eo bet va mab ezel eus ar c'helc'h-se. Da zibenn ar gwin-a-enor e voe graet un dañs gant tud ar c'helc'h, un dañs kanet anvet “*Rond de St Vincent*”, gant ur c'haner pennañ a gane hag an holl zañserion war e lerc'h a ziskane. Sachet e voe va evezh gant ar c'han-se. Kavout a rae din ez anavezen anezhañ, d'an nebeutañ unan all a denne dezhañ, rak disheñvel un tammig e oa an ton hag ar c'homzoù ivez. A-greiz-holl e zivorfilas va eñvor : tennañ a rae d'ur c'han e galleg em boa desket e Gwenvenez-Penfaw war-dro 1954/55 digant ur vaouez eus va c'hêriadenn. “*La boiteuse*” e oa anv ar c'han hag e kroge evel-se : “*C'était une boiteuse revenant du marché (x2) / Qui portait dans sa hotte des oeufs à plein panier (x2) / Les oeufs allaient rouli-roulant / Boiteuse en arrière boiteuse en avant / Oh ! Oh !*

¹¹ Diac'hin : *un contraire, une contrepartie.*

Regardez la boiteuse ! / Gué ! Gué ! Regardez son panier !” War-lerc'h e teu er baner “*yer*” a ya “*pipi-laripi*”, “*houadezed*” a ya “*coin-coin-lari-coin*”, “*deñved*” a ya “*béli-bélant*”, “*buoc'hed*” a ya “*brami-bramant*”, “*oc'hen*” a ya “*beugli-beuglant*”, “*kezeg*” a ya “*henni-hennant*”... ha da zibenn pep poz e vez diskontet er ster enep an holl loened a zo bet er baner betek ar vioù a oa da gentañ, evel ma vez kanet er Rannoù. En ur lenn levr Abeozen hag adlenn Ar Rannoù er Barzhaz em eus merzhet e oa gant “*La boiteuse*” frammadur ar Rannoù.

E brezhoneg ez eus ur c'han all gant ar frammadur-se ivez, “*Ar voualc'h*” eo e anv, hag emañ war bladenn Loeiz Ropars “*Rimodell ha Kanaouenn*” am eus meneget uheloc'h. Kregiñ a ra evel-se : “*Ar voualc'h he deus kollet he beg / he zeod hag he beg / Penaos e ray evit kanañ / Ma n'eus mui beg ebet...* war-lerc'h e vez kollet an daoulagad, ar penn, ar gouzoug, ar chouk, ar c'hein, ar c'hov, al lost, an divaskell... ha da heul pep rann-korf nevez e vez dezastumet ha dibunet an holl a zo bet a-raok betek ar beg en ur c'houlenn penaos e c'hellfe kanañ heptañ. Frammadur Ar Rannoù a zo gant ar c'han-mañ ivez.

Bez' eus ur ganaouenn vrudet er gallegva, anvet “*comptine canadienne-française*” gant Wikipedia, hag a zo bet savet gant frammadur Ar Rannoù pa soñjer mat : “*L'alouette*” eo, hag e krog evel-se : “*Alouette gentille alouette / Alouette je te plumerais / Je te plumerais la tête (x2) / Alouette (x2) / Ah, alouette je te plumerais...* war-lerc'h e teu *le bec, les yeux, le cou, les ailes...* ha bewech e vez dezastumet betek an derou evel gant Ar Rannoù. Hogen daoust hag e c'heller diogeliñ ez eo bet levezonet gant Gwerz ar Barzhaz Breizh ? Bez' e hañval d'an nebeutañ !

E 1993 eo bet embannet gant Dastum ur studiadenn hir war an danvez, gant Jean-Jacques Boidron, kelenner brezhoneg e Rödon. Talbenn al levr : “*Gousperoù ar raned ha Gourspered ar Rannoù, Enklask war ur ganaouenn hengounel*”, 540 pajenn el levr dre ma-z eo divyezhek. An droidigezh c'hallek, graet gant an aozour e-unan, a zo bet lakaet keñver-ha-keñver gant an destenn vrezhonek. Ken pizh ha pervezh en deus dielfennet danvez fonnus-tre *Gousperoù ar raned/ar Rannoù* ma-z eo diaes ober amañ un diverrañ eus studiadenn J.J. Boidron. An eilstummoù am eus meneget uheloc'h, n'int nemet un darn vihan eus pezh a zo bet dastumet gant meur a zen ha da vareoù disheñvel etre Kernev-izel, Kernev-uhel, Bro-Dreger ha Gorre-Leon. 39 eilstumm eo a zo dielfennet gant J.J. Boidron en e studiadenn. Ne vez ket kavet diouto e Bro-Wened ha nebeut-tre e Bro-Leon. Hervez an aozour e vije dleet an ezvezañs-se en div vro-mañ da levezon an Iliz he dije kavet e oa pagan ar c'han-se ha lakaet berz warnañ. Kalz disheñvelerioù a gaver etre an holl stummoù, pezh a ziskouezfe ez eo kozh-tre ar c'han.

Treuzkaset gant ar vouezh hepken e-pad pell, a zen da zen, e vije bet distummet seul welloc'h. Ne lavar ket avat emañ ar gwir gant Kervarker pe gant hini pe hini eus e zislavarerion met kentoc'h ez eus un tamm gwirionez gant pep hini.

A-benn ar fin, e dibenn e studiadenn e kinnig J.J. Boidron ur vartezeadenn nevez : Daoust ha ne vefe ket tu da welout er "*Rannoù*" roudenn un deziadur kozh rakkristen ? Kavout a reer stummoù *Gousperoù ar raned* gant 12 rann, hogen ivez gant 13, pezh a glotfe tamm pe damm gant framm un deziadur kozh diazezet war 12 miz an heol ha 13 miz al loar. Graet e vez meneg eus anv ar stered e-barzh stummoù 'zo : ar "*Yar*", ar "*Saezhour*" ; "*seizh deiz ha seizh loar*" a vez meneget hogos e pep stumm. Graet e vez meneg alies eus labourioù an douar, eus un toullad loened ivez a c'hellfed liammañ gant un arouezkelc'h kozh bennak pe gant gouelioù pagan, hogen ar "*Vuoc'h zu*" *flemm ar saezh en he c'herc'henn, o tont eus Koad-Ispailh* war-lerc'h ar *Saezher hellink (herlinkus) a flemm e saezh hag an daouzek arouez en em zrailh*" a ra din soñjal en emgann ar Boyne (*an Bhóinn* en iwerzhoneg) e 1690, ma voe trec'het Katoliged ar roue saoz didronet James II gant Protestanted William Orange. "*an Bhóinn*" (*bo+inn*) a dalvez "ar vuoc'h wenn", lesanv an doueez Eithne pe Ethniu ; e kontelezh Gaillimh ez eus ivez "*InishBofin*" da lavarout eo "Enez ar Vuoc'h-wenn". Ar "*Vuoc'h wenn*" deuet da vezañ "du", gant ar saezh he deus he gloazet, a c'hell derc'houezañ ar Gatoliged trec'het en emgann gant ar Brotestanted.

Koulskoude e tiskouez J.J. Boidron (pajenn 507, 509) ez eus un nebeut anvioù stered anavezet gant ar bobl e Breizh a c'hellfe klotañ tamm pe damm, daoust d'an distummadurioù, gant lod eztaoladennoù a gaver en eilstummoù disheñvel : Ar C'harr kamm (Ursa Major) : "*marc'hig kamm*" ; ar Yar (Pléiades) : "*Seizh planedenn gant ar Yar*" ; ar Ri/ar Roue

(Orion) : "*mab Herri*" ; ar C'hon hemolc'h (Canes Venatici) : "*ki chase*" ; Lez Don (Cassiopeia) : "*enez don*" ; ar Wiz (Cancer) : "*Ur Wiz hag unnek porc'hell*".

"Ma talc'her kont, eme J.J. Boidron, eus ar c'hartennoù bet adsavet ez eus c'hoazh muic'h a heñvelderioù" : ar C'hanrod (Corona borealis) : "*biz arc'hant*" ; ar Seiz Ejen (Ursa Major) : *an daou ejen*" ; ar Werc'hez (Virgo) : "*Mari*" ; Karr Arzhur (Ursa Major) : "*karr nevez*" ; Karr an Ankou (Auriga) "*Ankou tad an Anken*" ; Marzhin (Cepheus) "*teir rouantelezh da Varzhin*"...

Goulakadennoù hepken eo kement-mañ, a lavaro darn. Neuze, kement hag ober, emañ o vont da ouzhpennañ unan all. Anv a vez e brezhoneg eus "*Karr Kamm*" evit "*Ursa Major*" hag eus "*marc'h kamm*", "*marc'hig kamm*" e lod stummoù "*Gousperoù ar raned*". Neuze ne c'hellan ket mirout ouzhin da ober ur geñveriadenn gant ur c'han da zañsal a gaver e Breizh-Uhel (*Rond de St Vincent ha Laride* evit hini Gwenvenez-Penfaw (44) gant meur a eilstumm, frammet evel "*ar Rannoù*" ha ma komzer ennañ eus unan bennak a vefe "kamm". En hini am eus dastumet e Gwenvenez e komzer eus ur vaouez kamm hepken, hogen en hini eus ar Morbihan e vez anv eus ur "bloavezh kamm" kenkoulz hag eus ur "vaouez kamm", peogwir e krog ar c'han evel-henn : "*Sur les chemins du Morbihan, l'année s'en va boiti-boitant*" hag e c'hourfenn an dezastum gant : "*L'année s'en va boiti-boitant, boiteuse par derrière, boiteuse par devant*". An eilstumm diwezhañ-man dreist-holl a ra din soñjal e vije bet levezonet ar c'han gant "*Karr Kamm*" (Ursa Major).

Evel ma welit n'eo ket gourfennet c'hoazh ar rendael a-zivout "*Gousperoù ar raned*".

Yann MIKAEL

Deskadurezh

An Aotrou Alberto Carlos Almeida, anezhañ ur politikoniour ezel eus n'ouzon pet kevredigezh-studi ha n'ouzon pet kengor, a zo un ezel-skwer eus ar renkad alierion veur a vez selaouet outo gant kalz aked ha doujañs, ha paet mat-tre gant mistri ar politikerezh hag an armerzh e Brazil. Hag en e etrewel e abadenn Marília Gabriela, en deus diskouezet ur wech ouzhpenn penaos e c'hall e Brazil kefridioù ken uhel bezañ sammet gant unan hep tamm gouiziegezh ebet war ar c'hrafoù e prezeg warno.

Ne lavaran ket e vefe gwir an dra-se evit kement tra a vez diskleriet gantañ. N'em eus ket lennet, da skouer, e levr *A Cabeça do Brasileiro* (Ar pezh a

c'hoarvez e penn Yann Vrazil), lod a lavar din ez eo mat-tre al levr-se, ar pezh a gredan hag a gredin, feiz, betek marteze un deiz m'am bezo tro da gaout ur skouerenn eus al levr etre va daouarn ha da c'hallout amprouiñ drezon va-unan.

Padal, pa vez goulennet ali ez-foran digant un den dezhañ aotrouniezh skiantel, ha pa respont hemañ dre damall un ensavadur milvloaziek ez eus izili anezhañ e pep lec'h, e vefe gortozet eus e berzh un nebeud emskiant eus e zever e-keñver ar wirionez hag ar ouidigezh war an dra. Mard eo digas en un degouezh ken pouezus, n'eo ket divuzul soñjal e vo digasoc'h c'hoazh war grafoù disteroc'h, evel "*A Cabeça do Brasileiro*" da skouer.

Goulennet e oa bet digant an Aotrou Almeida petra a zo pe a oa bet kaoz da Vrazil bezañ ken warlerc'hiet e-keñver ar broioù all, ha petra a ra da bobl Brazil a-hiziv ober kement a fae war an deskadurezh. En e respont ne chomas ket etre daou : an holl gablusted a daolas diouzhtu hep mui na maez war un tamallad nemetañ : an Iliz katolik. Ha diwar e glevout e oa sklaer e oa anv evitañ aze neket eus ur vartezeadenn diratozh, met eus ur wirionezenn skiantel prouet-mat.

E soñj a c'haller diverrañ evel-mañ : a-hed Istor Europa, hag ivez er c'hevandir Amerikan abaoe ma oa degouezhet an Europiz ennañ, an Iliz Katolik n'he deus graet nemet war-dro deskadurezh ar vegenn, an noblañs, en ur zilezel ar bobl en dizeskadurezh. Gant an Adreizhadenn brotestant e voe bet ganet an deskadurezh poblek, hag gant ar gounid-se e c'hellas ar broadoù protestant bezañ savetoc'h eget o c'hevezerion gatolik. E Brazil e voe ar Jezuisted a oa kablus ar muiañ, pa roent deskadurezh d'ar vegenn nemetken ha netra d'ar bobl.

Anat eo n'en deus biskoazh an Ao. Almeida lennet levr ebet war istor an deskadurezh. Amañ dindan un nebeudig traoù a zlefe gouzout kent embann mennozhioù war ar c'hraf-se :

1. A-hed ar grennamzer, noblañs ebet ne resevas "deskadurezh" digant an Iliz. C'hoari brezel, sed aze an dra nemetañ a zedenne an noblañsoù hag ar varoned, ha sellout a raent ouzh ar studi evel un dra mat evit ar maouezed, an danvez-beleion hag un nebeud iskargidi all.

2. Adalek penn-kentañ ar grenn-amzer betek prantadoù pell a-walc'h er grez arnevez, ar skolioù izel bet savet gant an Iliz a oa en ilizoù, er chapeloù, pe er manatioù. Ha krediñ a ra an Aotrou Almeida o defe bet c'hoant an noblañsoù kuitaat o falezioù kaer evit mont d'en em veskañ eno gant kalotined ha tudigoù a netra ?

3. Evit ar pezh a sell ouzh ar Skolioù-meur, n'eo ket an noblañsoù eo a veze kenilet ganto ; mezeion, alvokaded, kelennerion, amaezhidi, ne lavaran ket. Un doare skeul e oa evit ar re a zeue eus liveoù izelañ ar gevredigezh. An noblañs er galloud ne grogas da deurel evezh ouzh ar Skolioù-meur nemet pa zeuas ar re-se da vezañ kreizennoù galloud politikel drezo o-unan : sed aze orin ar brezel etre an Iliz hag ar gouarnamantoù hollveliek, evit gouzout piv a vefe mestr war ar reizhiadoù-keleñn skolveurel. Peogwir e c'hounezas an Iliz ar bras eus an emgann-se e c'hoarvezas neuze un darvoud na gaver nemet er marevezh arnevez : ganedigezh ur renkad kfredourion, noblañsed an holl anezho koulz lavaret, estren ouzh metoù ar Skolioù-meur, ha gelenek outo alies. Descartes, Bacon, Montaigne, Newton ha krouidigezh ar Royal Society a zo skouerennoù anat eus kement-se. Kontrol-mik eo an istor gwirion da istor-faltazi an Aotrou Almeida.

4. E kreiz an eiteket kantved, war-lerc'h daou gantved dija a Adreizhadenn brotestant, e oa c'hoazh Bro-C'hall gatolik ar vro frouezhusañ ha sklerijennetañ en Europa, hag e oa pell war he lerc'h Alamagn bro c'henidik Luther, ken n'oa ket c'hoazh an alamaneg ur yezh a sevenadur uhel (ar gefredourion a skrive e galleg pe e latin). E kreiz an naontekvet kantved, eo e Pariz e komprenas an uhel rener alaman Otto von Bismarck pegen pouezus eo d'ur vroad arnevez kaout ur renkad-etre desket-mat, hag e klaskas neuze drevezañ ar patrom gall, en ur gemm ar stur relijiel nemetken, dre heskinañ ar gatoliked ha sevel un deskadurezh hollbrotestant.

5. Ar pep kaerañ avat e diskleriadennoù an Aotrou Almeida eo ar pezh a lavar war ar Jezuisted. Neb en deus studiet o istor un disterañ a oar penaos reiñ deskadurezh d'an Indianed a oa unan eus o sorc'hennoù pennañ. Er misionoù, e veze resevet gant an Indianed un deskadurezh kalz uheloc'h eget an hini roet er c'herioù-bras da noblañsoù leun a zigasted hag a snoberezh, a oa gwelloc'h ganto kas o mibion da Europa kentoc'h eget d'ar Jezuisted, pa felle dezho reiñ deskadurezh dezho.

6. Adalek prantad Brazil emren betek prantad ar Republik brazilian, e veze difennet ouzh an Iliz digeriñ skolioù, ken e steuzias muioc'h-mui er c'herioù ar seurt deskadurezh a veze roet gant ar Jezuisted. An dizeskadurezh poblek e Brazil ne zeuas ket eus an deskadurezh katolik, met eus ar vougidigezh anezhi e-pad ur c'hantved pe dost.

An Ao. Almeida a adlavar alies ez eo an dizeskadurezh ar walenn bennañ e Brazil. Re wir! Eñ an hini a zlefe deskiñ da gentañ. Eñ hag an holl alierion veur all.

Ur goulennig a rank treiñ e spered al lennerion moarvat, d'ar poent-mañ : ma n'eo ket an Iliz Katolik eo a zo kablus en dizeskadurezh a-vremañ e Brazil, piv eo a zo kablus neuze ?

N'ouzon ket. N'en em veizan ket evel ur barner en ul lezvarn a Dorfedoù a-enep d'an Deskadurezh. Un dra a zo sur avat : e Brazil, ar fae war an deskadurezh a ya dalc'hmat a-unan gant azeulidigezh an arouezioù-diavaez a rank sañset jaojañ an deskadurezh-se : parchoù, anvidigezhioù, kargoù, enorioù, plasoù er stlenn, mignoniezhioù gant tud a-feson, h.a. Ken anavezet ha testeniet eo an dra-se e lennegezh Brazil (kv. Lima Barreto ha Graciliano Ramos, da skouer), ken n'eus ket ezhome pouezañ war se. Siwazh e vez kreñvaet an eil walenn-se gant eben a-vuzul ma tremen an amzer, en ur c'helc'hiad a seblant bezañ didorradius.

Evel-se emañ an traoù : peogwir n'eo ket gwall sklerijennet an uhelgargidi er politikerezh hag en armerzh e Brazil, ne c'hallont ket barn drezo o-unan piv a zo barrek ha piv a zo ur beg-bras war un empenn goull, en teskad tud a ginniger dezho. N'o

deus ket kalz a vinviji evit barn estreget an arouezioù diavaezel, ar parchoù hag ar c'hargoù, hag atav e echuont dre selaou ouzh unan n'en deus netra sirius da lavarout dezho na netra talvoudus dezho da ober. An dizeskadurezh a gresk drezi hec'h-unan, kaer ha fonnus evel ur c'houblad lapined.

Brasoc'h c'hoazh an droug a vez graet gant ar sotonioù a zeu eus an estrenvro, gant ul liv "peurarnvez". E-pad marevezh ar gouarnamant Vargas e Brazil, ur c'haer a raktres evit degas deskadurezh d'ar bobl a yeas da netra a-benn ar fin, peogwir e voe levezonet gant mennozhioù John Dewey, a oa mil veulet d'an ampoent evel un diaraoger meur. Hiziv e ouzer ez eo unan eus ar re o deus diskaret ar reizhiad-deskadurezh norzhamerikan, a oa bet an hini gwellañ er bed-bezh betek-henn. Hag adalek ar bloavezhioù 60, (ya, e-pad prantad groñsveliezh an Arme e Brazil e oa dija kroget an traoù-se) e teuas giz ar gevredadsavelouriezh¹², gant mennozhioù Jean Piaget, Emilia Ferrero, Vigotsky ha me oar-me pet re all.

Abaoe hanter-kant vloaz e vez lakaet ar mennozhioù-se da dalvezout e skolioù Brazil evit brasañ asotaj hor bugale ; a-unan gant kreskidigezh dreistordinal an niver a skolioù ha kreizennerezh brasoc'h-bras ar reizhiad-kelenn, e vez peurzemokratelaet e-giz-se ar sotoni hag an dizeskadurezh, betek an tachadoù distroañ pe paourañ. N'eo ket souezhus e kavfe gwelloc'h an Ao. Almeida lakaat ar gablusted er walenn-se war chouk Jezusted marevezh pell ar "Brazil trevadenn" kentoc'h eget teurel re a evezh ouzh ar pezh a zo o c'hoarvezout bremañ-bremañ dirak e fri.

Ha perak e c'hoarvez an traoù-se ? Peogwir en em lez ar renerion dizesk da vezañ teoget gant ar stlenn ha fulennoù berrbad giz an devezh, e-lec'h arnodin ha keñveriañ ; setu e verniont fazioù hag enkadennoù ingal-mezhus.

Neb a breder war gement-se ne c'hall ket tremen hep merzout ez eo kontrol-rik ar gudenn d'ar pezh a vez diskleriet gant an Ao. Almeida : n'eo ket e vefe kelennet ar vegenn nemetken hep damant d'ar bobl. Er c'hontrol, klask a reer dalc'hmat reiñ deskadurezh d'ar bobl a-raok bezañ savet ur vegenn gouest da zegas deskadurezh dezho, pe gouest d'an nebeutañ da brederiañ ez-sirius war ar gudenn.

Neb en deus kelennet na pa vefe nemet un devezh a gompren ez a en-dro ar c'helennerezh evel skingaserezh : da gentañ e kelennit dek a dud, a gelenno kant a dud, a gelenno mil a dud, hag all. Lakaat an urzh-se war an tu gin a zo evel goulenn digant ar vibion ganañ o c'herent.

Gouarnamantoù Brazil a bromet deskadurezh da vilionoù a dud hep kaout zoken dek kelenner-meur evit studiañ ar gudenn. Perak na stummañ an dek a dud-se da gentañ ? Ar re a rafe anv a "vegennouriezh an tu dehou-pellañ" en degouezh-mañ a rankfe lenn Lenin ha goulenn outo o-unan perak e voe savet kreiz ha begenn ar Framm gantañ kent sevel ar peurrest. Lenin en doa komprenet eo al lost a vez hejet gant ar c'hi, ha n'eo ket ar c'hi a vez hejet gant al lost !

Penaos terriñ kelc'h un uhelrenerezh dizesk heñchet gant brabañserion ken dizesk hag int ? Ne veizan nemet un diskoulm : krouiñ, er-maez eus ar reizhiad-kelenn, pell eus ar yoc'hstlenn, pell eus enorioù goullou gizioù ar marevezh, ur c'hefredva¹³ gourdonet-mat, gwirion ha taer a-walc'h evit lemel kuit ar pennoù kleuz ha terriñ an idolennoù pa vezo deut an eur.

Abalamour da se end-eeun e kavan alies ez eo ur c'holl-amzer "dibab e du" en aferioù a vez breutaet a zeiz da zeiz e Brazil. Gouzout a ouzomp dija eus pelec'h e teu an holl gudennoù, neketa ? Gouzout a ouzomp dija e teu kement gwalenn e Brazil eus dizeskded digas ha pompadus un uhelrenerezh na selaou nemet ouzh fougaserion dizeskoc'h c'hoazh. Perak koll amzer da reiñ koad d'ar politiker-mañ pe - hont pa ouezomp mat ez eo a-walc'h ur brizh-prederour nemetken evit genel miliadoù a bolitikerion evel-se, pe re all gwashoc'h c'hoazh a-benn dek pe pemzek vloaz ?

Perak klask argas c'hwiled-du dre lakaat ul lomm naftalin warno unan hag unan ? Reiñ d'ur c'hant bennak a yaouankizoù un aezhenner mat evit glanaat an aer en-dro deor, setu ar pezh a ranker ober.

Evit echuiñ, ur c'hraf disheñvel penn-da-benn : ar gelaouenn alaman Der Spiegel a ra "United Stasi of America" eus ar Stadoù-Unanet. Stasi a raed eus polis kuzh en Alamagn ar Reter, an Alamagn komunour. War-lerc'h bezañ lakaet ur reizhiad spierezh ramzel war ar pellgomzoù hag an urzhiataeroù, emañ bremañ an Ao. Barak Obama o klask lakaat ar gargidi-stad da spiañ an eil war egile dre ret. Seurt mennozh a gaver dija e oberenn Makiavelli, en e raktres "trede Roma" - ar c'haouveliezh dizistrujadus.

Olavo de Carvalho

Brezhoneg gant **Ewan Delanoy**. Lakaet ez eus bet a-gevret amañ daou bennad : an hini kentañ embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Consultores Iluminados*, niverenn ar 15 a viz Gouere 2013, hag an eil en hevelep kelaouenn, dindan an talbenn *Casal de Coelhos*, niverenn ar 18 a viz Gouere 2013.

¹² Kevredadsavelouriezh : *socio-constructivisme*.

¹³ Kefredva : *intelligentsia*.

Hon Tad

Bez' e oa un deiz ma veve Jezuz en un doare kreñv e zarempred a vab er bedenn, ma voe goulennet outañ gant un diskibl : "Aotrou, deskit deomp pediñ !" Bez' e felle d'an diskibled mont ivez en darempred neshentek-se gant Doue. Bet int bet testoù brientek ar bedenn-se. Alies e taskoun¹⁴ evidomp-ni ar ger "pedenn", an arvesterezh didrouz ha dilavar. E bed ar C'hrist n'eus ket a bedenn a vouezh izel. Testennoù rabinek 'zo a verk deomp e vez a-wechoù lavaret d'an dud en Templ : "Arabat deoc'h garm re greñv". En hebreeg ar verb "pediñ" a zo "garm". C'hoarvezet eo sur-mat d'an diskibled klevout Jezuz o pediñ a vouezh uhel, neuze eo bet fellet dezho pediñ eveltañ.

Neuze en deus roet deomp pedenn an diskibled evit ma pedfent eveltañ ha gantañ. Hag ez eo war hon douar en deus Jezuz, ar c'hentañ, distaget ar c'homzoù-se evit e ziskibled da zont en holl amzerioù. Desket en deus deomp ar bedenn-se "Hon tad". Graet en deus ar road-se d'e Iliz ha dre se d'ar bed. Dereñ a ra d'e Iliz e bedenn dezhañ e-unan evel Mab.

Kelennet hogen ivez urzhiet : "C'hwi neuze, emezañ, pedit evel-se..." Ar Bater a strinkas diouzh pedenn end-eeun Jezuz, an diverrañ diouti ez eo. Bez' ez eo ar bedenn m'en deus Jezuz krennet enni e holl angerzh¹⁵ evit mab-den hag evit Doue. Rannet en deus un dra bennak eus e bedenn a vab, eus e ganterbedenn¹⁶ e dorn-dehou Doue.

Hag e kredomp ez omp karet gant an hevelep karantez ma kar an Tad e vab nemetañ. Komzet en deus Jezuz evel ur bugel bihan d'e dadig, a-hed e nozvezhioù teñval gouestlet d'ar bedenn (Lukaz 6/12). Emañ ar brient dibar-se e kreiz e gemennerezh hag henn dereñ a ra deomp evit m'en em santfemp soubet, d'hon tro, e-kreiz an Tad.

Neuze, ez eo "Hon Tad" ar bedenn dreist pep hini, dre ma-z eo Jezuz hon Aotrou en deus desket anezhi deomp. Bez' ez eo ar bedenn nemeti a zle kement pedenn 'zo, dre ret, ober dave dezhi, an hini a vez kelennet gant an Doue graet den da gement den. Bez' ez eo ur bedenn neket boutin hepken etrezomp, hogen etre Jezuz ha ni.

N'en deus ket Jezuz roet da gentañ un destenn da zibunañ. Bez' ez eo kentoc'h ur patrom, rizh kement pedenn 'zo. An diazerc'h hag an diazremm a ya a-gevret.

Pedenn ar Rouantelezh ez eo. Tertullian a skriv ez eo ar Bater un diverradur eus an Aviel. "Bez' en deus,

emezañ, nodekaet¹⁷ relijion ar bedenn ha pa zeu er-maez eus e c'henou, en deus roet d'ar bedenn e spered ha staget outi ar vertuz da bignat en neñvoù ha tizhout kalon an Tad dre gomzoù desket digant ar mab". Ya, tizhout kalon un tad. ABBA, ar ger arameek bet desket dezhañ gant e vamm c'halileat, pa oa bet ganet den. Neuze, pediñ eveltañ, ez eo gervel Doue Tad, Abba. Div silabenn, eeun kenañ, ma hiboude ar vugale en ur sevel o sell betek hini o zadoù : Tadig ! Ar C'hrouer, an Arloz anvet Tadig : biskoazh kement-all !

N'eo ket Doue un tad bennak, un doare tad, un tad gwir ez eo. Doue a zo hon Tad, d'an holl ac'hanomp, hogen pep hini ac'hanomp a zo e vab unel. Ar Bater n'eo ket ur pleustrad war ar bedenn, hogen bez' ez eo pedenn ar pedennoù, ar patrom m'en deus Jezuz dastumet ennañ kement tra a felle dezhañ treuzkas d'e ziskibled eus e bedenn dezhañ. Ha koulskoude pebezhe eundet ! Ur bedenn bugale... pedenn ar beorion. Bez' ez eo Jezuz, an hini en deus roet deomp ivez, ar gwir da c'hervel e Dad, Hon Tad. Hag ez eo e gwirionez hag ez eo deomp. E 1994, an Tad-se leun a zousted a lavare da Vassula Ryden : "*Da Dad muiañ-karet ez on, hag a vir ac'hanout peget ouzh e vruched*". Ur bedenn-rizh ez eo, hag e doare pe zoare, e ranko ar bedenn gristen kengloañ ganti.

A-benn ar fin petra ez eus gant endalc'had ar bedenn vras-se ? : santeladur anv Doue, ar Rouantelezh a zle dont, ar youl a zle bezañ graet, ar bara, ar pardon, chom hep kouezhañ e temptadur¹⁸, an dieubidigezh diouzh an Droukspered (pe diouzh an droug, an hevelep ger eo e gresianeg). Eus hon ezhommoù danvezel ha speredel ez eus anv. Dindan ar gerioù peurbadel ez eo hor c'hudennoù a vez anv anezho, ez eo an diskoulmoù a vez eztaolet, an diskoulmoù-se a vez klasket, hervez kelennadurezhioù all, gant an denelezh er gwad hag en daeroù, ha na vez kavet gwech ebet ganti. Ar bara, beziadelezh ar vuhez en he fezh ez eo, ar pardon, rak an hini nemetañ eo a

¹⁷ Nodekaet : *codifier*.

¹⁸ « Kouezhañ e temptadur », pep hini ac'hanomp a oar (peogwir 99% eus ar Vreizhiz a zispleg ar Bater, henn gra e galleg bremañ) n'eo ket se e galleg gant an tro-lavar "*Et ne nous soumet pas à la tentation*" degemeret da c'houde Vatikan II. Anv ez eus er mare-mañ da zaskemmañ an dro-lavar-se e "*Et ne nous laisse pas entrer en tentation*". Un tammig gwelloc'h eo, hogen n'eo ket reizh-tre c'hoazh, rak kement ha goulenn ouzh Doue distrujañ an temptadur eo, ha se ne c'hell ket bezañ, Jezuz e-unan a zo bet temptet e-pad e emdenn en dezerzh. Bemdeiz-Doue ez omp temptet, ha muioc'h eget biskoazh er c'hantved-mañ ma vevomp ennañ, ha daoust deomp ez antreomp en temptadur-se, enlusket gant binvioù ha gwikefreoù ar sevenadur arnevez. Pezh a zo penndalc'hel ez eo « chom hep kouezhañ en temptadur-se », hag an dro-lavar gallek kozh "*Et ne nous laissez pas succomber à la tentation* » a oa reizh-tre. *Notenn gant Y.M.*

¹⁴ Daskounañ : *évoquer*.

¹⁵ Angerzh : *passion, inclination très vive*.

¹⁶ Kanterbedenn : *intercession*.

c'hell pardonñ, an temptadur, rak an hini nemetañ eo a c'hell diogeliñ an trec'h.

Un nebeut evezhiadennoù. D'ar vugale ez eo ret deskiñ dezho da gentañ ar Bater, pedenn a vez adlavaret abaoe kantvedoù gant muzelloù kristen. Ra vo gant ar bugel pa gomz ouzh Doue, ar santad ez eus gant komzoù e bedenn un dra bennak kevrinus, e vri ouzh Doue ne c'hell bezañ nemet kresket. Kement-se en deus nebeut a ster evitañ ha n'eo ket aes da zisplegañ. Hogen ha diogel ez omp e kompren en o ster leun fablennoù Yann ar Feunteun ? Pedenn elfennel kreizet war ar pep retañ, ne vez ket amsavet

kement pedenn a zo gant ar Bater. Ne zlefe ar ger "Tad" bezañ uzet. Fellet ez eus d'ar Salver e pedfemp el liester. Ar Bater a vez lavaret en anv an Iliz en he fezh, *in persona totus Ecclesia*, a ziogel St Tomaz. Pa vez lavaret, e lavarer anezhi gant an engroez, gant engroez ar bobl gristen. Adalek ar c'hantvedoù kentañ e vo displeget ar bedenn-se el liderezh kevradiel¹⁹, a-raok ar c'hedunadur²⁰.

Youenn Troal

¹⁹ Kevradiel : *eucharistique*

²⁰ Kedunadur : *communion eucharistique*

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

1000 klemmadenn a zo bet graet a-enep an emplantenn brec'hagnaüs²¹ "Essure" (eus Arnodvaouù Bayer). Aes-tre e c'heller staliañ en emplantenn-se er c'horzennoù-uterus. N'eus ket ezhomm sikour ha ne zegas diaezamant ebet war a lavarer deoc'h. En ur ober tri miz e ra d'ar gorzenn-grozh bezañ direizhet, ha dizistro eo : difrouezh da vat e chomo ar vaouez. Hogen, hervez **Erin Brockovich**, an alvokadez brudet bet c'hoariet ar roll anezhi gant Julia Roberts pa stourmas a-enep ar Pacific Gas and Electric er bloavezhioù 90, **Essure a zo fall evit ar yec'hed**. Tost da 1000 klemmadenn a zo bet graet er *Food and Drug Administration* en abeg d'an heuliadoù fall a zo bet renablet gant ar maouezed o deus implijet an emplantenn : diwaderezhioù direizh, benvegadoù toullet, poanioù reoliek, dilamadurioù mallus eus ar grozh, hag unan a vefe marv zoken.

Hervez ar studiadenn a-vras (20 % eus poblañs ar C'hanada niveradeget e 2006) bet graet gant Douglas W. Allen ha bet embannet er gelaouenn [Review of Economics of the Household](#), **65 % hepken eus ar vugale bet desavet gant koubladoù gay pe lesbian a dizh live ar vachelouriezh** ken mat hag ar vugale desavet en un tiegezh gwirion. Mat eo notañ ivez en em denn kalz gwashoc'h ar merc'hed e-touez bugale oaledoù ar pared heñvelreizh eget ar baotred.

Hervez ur sontadeg gant Harris e miz Du e lavar **41 % eus an dud** e talc'hint kont eus menozioù an danvez-maered diwar-benn **lezenn Taubira** a venn lakaat daou darv d'ober unan bihan evit **mouezhiadeg ar c'humuniou**.

Maodiernezh an «Deskadurezh» c'hall en deus brudet niverenn bellgomz «Azur» ar gevredigezh SIS, a skign a hent-all al levrig hudur «*Tomber la culotte*», a vrud al **lesbianouriezh**. Digeriñ a ra frank dorioù ar skolioù d'ar c'hevredigezhioù «**LGBT**». Divizet eo bet plediñ gant an «*éducation à la sexualité*» (diaes eo treiñ seurt menoziad pa 'z eo

evit gwir direizhañ ar vugale war boent ar revelezh, n'heller ket komz a «zeskadurezh» hogen kentoc'h a zihentadur kealiadurezhel a-du gant an heñvelrevelezh, an divrevelezh, an dreuzrevelezh, hag a zisoñj evel-just komz eus al liamm strizh a zo en divezelezh kristen etre karantez ha revelezh). Ha kement-se adalek 6 vloaz mar plij²² ! Divizet eo bet ivez krennañ war an amzer a dremen ar vugale er gêr gant sizhunvezh ar pevar devezh hanter (an hanter devezh a oa bet miret diwar un emglev gant an Iliz evit ma c'hellfed katekizañ ar vugale, ret eo notañ ez eo chomet mut an eskibion c'hall, evel boas...), ha berroc'h e vo an ehanoù-hañv. D'ar 4 a viz Genver 2013 en doa diskleriet Peillon e fell dezhañ (ha d'e genseurted tri fik) «*en em harpañ war ar yaouankizoù evit kemm tro-spered an dud*». A-raok en doa diskleriet ez eo ret «*diframmañ ar bugel diouzh devouderezh an tiegezh*».

Lezennoù all a-enep an Tiegezh a zo bet gourbannet ingal ha niverus-tre ar bloaz-mañ :

E miz Genver e oa bet savet «Uhel-guzul **an ingalded**» evit kas war-raok «*ar gwirioù revel ha gouennañ*» : ur yezh koad a dalvez e komzoù fraezh gwashaat c'hoazh lazhadeg ar vugale e kof o mammoù. E Frañs evit 4 bugel ganet ez eus unan all a vez diforc'het e kof e vamm. 35 % eus ar maouezed en oad da c'henel o deus diforc'het ur wech da vihanañ.

E miz Meurzh, da Sul Fask en em gave d'an 31, e oa e talvoud lezenn dastaladur **100 % eus mizoù an diforc'hañ-bugale** (notañ n'eo ket bet lakaet d'ar c'hentañ eus ur miz, evel ma 'z eo boas, met da Sul Fask...).

E miz Mezheven e vo lakaet e talvoud **Lezenn Taubira**.

²¹ Brec'hagnaüs : stérilisant, hervez ar geriadur 21. Ober d'un dra bezañ difrouezh.

²² D'an 18 a viz Du ez eus bet ur gemennadenn a-berzh Aozadur-bed ar yec'hed (OMS), gant an Doktoez Gunta Lazane "An Deskadurezh revel a rank kregiñ ken abred hag ar c'hanedigezh".

E derou miz Gouere : kemeret e oa bet **disenteziou nevez evit sammañ diforc'hadeg ar vugale** e-pad an hañv.

D'an 11 a viz Gwengolo e klaskas maodiernez «Gwirioù ar maouezed» lakaat dre ret **alioù evit diforc'hañ e-barzh paperenn-displegañ ar prouadoù-brazezed**.

D'an 13 e voe graet digoroù bras d'**ur c'houlzad darañviñ e Frañs evit an hilastaliñ hag an diforc'hañ-bugale**.

D'ar 17, war zigarez an danvez-lezenn evit an ingalded gwazed-maouezed e oa bet ebarzhet ar mennad da grouiñ **ur felladenn** nevez pa vez miret ouzh unan bennak da vezañ kelaouet **war an diforc'hañ-bugale**.

D'ar 27 : roet e oa bet lañs d'ul **lec'hienn a-berzh stad da vrudañ an diforc'hañ-bugale** a-benn enebiñ ouzh al lec'hienn holl-anavezet www.ivg.net . N'eur ket deuet a-benn da rediañ Google da ginnig gwelloc'h lec'hiennoù an Ankou avat.

E miz du : Uhel-guzul an ingalded a rent e labour evit **lakaat c'hoazh an diforc'hañ bugale da vezañ un dra dibouez hag aes** da gas da benn. Gwir eo ne glever ket ar babig pa vez toullet e glopenn e kof e vamm. «*Diforc'hañ bugale evit an holl ha frankiz-soñjal ebet ken*», a lavare Gregor Puppinc.

100.000 kristen o deus kollet o buhez er bed en abeg d'o feiz e 2012, e Frañs zoken (**Ur merzher bep pemp munutenn** eta.

Er «Conseil Consultatif National d'Ethique» (**Poellgor-kuzuliañ ha divezekaad Bro-C'hall**) ne gaver mui den a relijion ebet. A-youl gaer eo bet graet gant Hollande n'en deus anvet nemet tud a-du gant ar reveulzi sevenadurezhel en deus c'hoant da gas war-raok, gouez da Taubira.

E **Bubri**, e kreiz miz Du eo bet diskaret c'hoazh un delwenn e chapel Santez Helena (Div all a oa bet diskaret d'an eil a viz Gwengolo). E **Bieuzhi** e dibenn miz Du eo bet bountet an tan e chapel Kastenneg, un nebeut mizioù goude bezañ bet dispennet un delwenn eno delwenn sant Jozef. E **Ploue** e dibenn miz du eo bet diskaret div zelwenn, unan anezho a zo hini Gwerc'hez Vari Lourda a oa bet staliet e Ploue er bloavezhioù '50 da heul pareidigezh vurzhdus ur vaouez eus ar barrez.

Er **C'hameroun** eo bet skrapet ur beleg gall, ha rebechet eo bet outañ gant Hollande da vezañ bet «kemeret riskloù» daoust ma ne rae nemet e labour misioner en tolead-se, tost da harzoù Nigeria hag islamourion Boko Aram. Sed aze darvoudoù a ziskouez ez a ar c'hristengaserezh war-raok war e bouez.

E bro **Alamagn** eo bet **tennet digant ur familh he fevar bugel** diganti dre ma nac'he o zud o c'has d'ar skol. **Kavout a raent gwelloc'h o skoliañ er gêr**.

Niver ar veleion-eskopti e Penn-ar-Bed

	1960	2004	2013
War o leve	100	155	120
E karg	906	235	139
E karg < 30 vloaz	33	0	0
Nevez-beleget	20	0	1
En holl	1059	390	260

D'ar c'hentañ sell e weler ez eo tonket eskopti Kemper ha Leon, evel an darn vras eus eskobiezhioù Europa, da vont da netra a-barzh nemeur. N'eus ken 'met hiniennoù a vez beleget, ha n'eo ket mui niveroù bras. Merzout a c'heller ivez e teu nevez-beleion 'zo ha kloareged 'zo diouzh metoù... Emsav ar brezhoneg, ar pezh a zo nevez ha souezhus. C'hwec'h kloareg hepken ez eus evit an eskopti, en o zouez... daou vrezhoneger mat, hag ar beleg nemetañ a zo bet urzhiet ar bloaz-mañ a zo bet skoliet penn-da-benn a Diwan, betek al lise. Warlene dija, ar beleg nemetañ eus an eskopti a zo brezhoneger, hag ivez un diagon diaspad war an tri a oa bet urzhiet.

En Naoned e oa bet taolet un torkad bleunioù er stêr gant pennadurezhioù kêr an Naoned o kounaat marevezh-aour porzh an Naoned, ar C'henwerzh Tri-c'hornek, un digarez evit keuziañ bepred hag adarre d'ar sklavelezh a rene d'ar poent-hont. Anv ebet ganto avat eus **Goulag kentañ an Istor** maz eo bet prizon divent tiez-etrepaouez porzh an Naoned hag hendad Forniou-pulluc'hañ Hitler : **Kobiri Carrier**. Setu aze perak e oa bet kounaet Euzhusterioù Carrier e-pad an Dispac'h gall d'ar Sul 17 a viz Du : etrepaouez-tiez porzh an Naoned o deus herberc'hiet war-dro **13000 prizoniad**. 10000 anezho a voe lazhadeget. Tri mil a varvas diwar gleñvedoù (ar vrec'h-du alies), 2000 a voe fuzuliet pe dic'houzouget hag etre 1800 ha 4000 a voe beuzet e-barzh «ar stêr republikan» gouez da Garrier. Anv ez eus da enoriñ unan anezho : an **Aotrou beleg Yves Coat** bet beuzet d'ar 16 a viz Du 1793 war-dro hanternoz en ur gobar karget a 90 beleg all, ha kaset d'ar strad etre Trentemoult ha Chantenay. Dalc'homp soñj ! Ur gwitrail a vo staliet e chapel Sant Aogustin penniliz Sant Donasian da zerc'hel soñj ha da enoriñ ar beleg-merzher-se hag e geneiled, bet lazhbet en abeg d'o feiz. Kas a c'heller ur profig da Association Mémoire et Lumière 2 bali Ney 44000 Naoned. **Koun Chouan Breizh** a vodas un tammig ouzhpenn 100 a dud evit devezh-koun-se eus ar 17 a viz Du. Ar gevredigezh-mañ he deus nevez stourmet taer ouzh kuzul-kêr **Gesté**, e-kreiz tolead brezelioù ar Vande, hep dont a benn d'o mirout a ziskar o iliz-parrez. Koun chouan Breizh, 2 straed Solferino, 44130 Faouell (Fay de Bretagne) (Skodenn-vloaz 32 euro).

D'ar Yaou 10 a viz Gwengolo 1874 em em ziskouezas **ar Werc'hez Vari** d'ur paotr 17 vloaz, Yann-Vari ar Bod-derv eus Koad-kistin e **parrez**

Noal-Muzilheg. E kêriadenn Gerio a zo war hent gevred ar bourk eo e c'hoarvezas : ur chapel a zo bet savet eno e 1882. "*Pediñ a ri evit Breizh*" emezi dezhañ. Ar paotr avat ne ouie ket petra eo "*Breizh*" evel kalz eus e genvroiz dic'houzvez zoken war anv o bro.

Lennadurioù : Bernet (Anne) .- Les Grandes heures de la Chouannerie .- Perrin 1997, 375 p.

Diwar an oberennoù niverus a zo bet skrivet war ar chouanerezh, ez eo levr Anna Bernet, daoust dezhañ bezañ gwall hir da lenn, ur seurt berr-lennadur anezho. El levr-lennadurezh a ginnig e dibenn he levr e kaver evel-just roll al levrioù he deus lennet a-benn gellout sevel hec'h oberenn. Un tamm dipitus eo al levr evit ur Breizhad dre ma gomz nebeut diwar-benn an darvoudoù er pemp departamant. He familh a zo eus bro ar "Maine", setu aze perak. Kement-se ne vir ket outi d'ober anv eus Kergidu, Kiberen, Pont-al-Loc'h, Armand de la Rouërie, evel-just, hag e verk mat e oa en em savet evit difenn frankizioù Breizh bet nac'het ouzhip e-pad nozvezh ar 4 a viz Eost 1789. Buhezek-mat eo yezh ar skrivagnerez, leun a fent alies, daoust ma pled gant darvoudoù skrijus-kenañ : lazhadegoù diniver an Dec'hadeg d'ar Gwalarn a zo anavezet un tamm bremañ, re ar Vande a zo ivez a-drugarez da levr Secher war ar "Memor-lazh" da heul ar Gouenn-lazh. **200.000 a dud da vihanañ a zo bet lazhet** diwar urzhioù dre skrid Renerien an Dispac'h gall... N'eo ket diuntuek al levr : reiñ a ra testeni un nebeut Chouaned aet en egar diwar grizder Ar Re C'hlas pe c'hoazh da heul lazhadeg Kiberen pa n'en doa ket ar Penn-lu Hoche dal'het d'e c'her hag er c'hontrol lakaet fuzuilhañ miliadoù a brizonidi o doa rentet an armoù war an diviz ma vefe laosket o buhez dezho. Reiñ a ra skouer an Aotrou de Lantivy, a oa aet ken kriz ma oa bet dilezet gant e holl chouaned. Siwazh dezhañ e vo kriz-meurbet e dremenvan : divizet en doa lazhañ Hoche a oa en hent war-zu Roazhon, etre Pondi ha Josilin. Gwisket evel ur chouan - a glot mat gant an hini skeudennet divalav gant Balzac en e levr "Les Chouans"- , ha puchet war ur c'hleuz war ribl an hent e skoazellas a-greiz-holl e fuzuilh a guzhe dindan e vantell, hag e tennas war ar Penn-lu treitour d'e c'her. Hebioù ez eas ar bolod tra ma rede dija war-zu ennañ daou Houzard war varc'h, o sabrinier er vann... Neuze, war-lerc'h, e rankjod dastum e gorf didammet ha strewet war an douar, gwadek-holl d'o lakaat en un arched : drailhet e oa bet.

E **Georgia**, bremañ pemp bloaz 'zo, e oa bet kavet ur c'hlopenn **Homo Sapiens** a 1,8 milion a vloavezhioù. **An dizoloadenn-mañ a gas da netra an**

Darwinelouriezh a lavare e teue an Den eus Afrika er mareoù-se. Diwar ar gavadenn ne c'heller ket mui lavarout e tiskennfe an Homo Sapiens diouzh Homo Erectus Menez Dregan Plouhineg (450.000 a-raok H.S.) ha dre se ne c'heller ket mui goulakaat da heul an Darwinourion e c'hellfe emdreñ adarre gouenn an dud.

Oberiantizoù hon Emglev

Nevez-lakaet hon eus war al lec'hienn un Hentenn Silabennek e brezhoneg bet savet gant Emil Ernod («Ar Groaz Doue») evit sikour ar gerent da zeskiñ lenn d'o bugale (un drederenn eus bugale ar 6vet klas o devez poan da lenn a vouezh uhel). Lakaet eo bet ivez war al lec'hienn Levr ar profed Daniel frouezh ur c'henlabour etre Pêr bourdelles ha Maodez Glanndour, ha Levr ar profed Yezekiel gant Maodez Glanndour. War ar stern emañ eil levr Makabeed gant Klerg ha levr ar Varnerion.

D'ar sadorn 14 a viz Kerzu e oa bet aozet un devezh-koun da lidañ 70vet deiz-ha-bloaz merzherinti an Aotrou Perrot. Un digarez evit izili 'zo eus EAT d'en em gavout. Titouroù : koatkeo@sfr.fr

War-raok ez a raktresoù ar c'hatekiz, Liderezh an eurioù hag ar Bibl, tra m'emañ war ar stern raktres ul lec'hienn a-ratozh evit hon embannadurioù.

Oferenn Pellgent Nedeleg : 20e e Treglañviz **Gwengamp** (skignet war-eeun war Radio Frañs Breizh Izel) ; **An Orient** -Santez Anna an Arvor adalek 18 eur ; E **Trelevenez** adalek 21 eur.

Setu deuet dibenn 2013 gant an niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc'h*, soñjit, mar plij, kas ho skodenn : 15 € (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn) da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Trugarez deoc'h en a-raok !

Evit **Nedeleg** ha **Kala-bloaz** profit levrioù : *Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue* gant Youenn Olier hag *An Emgav-Chanter ha danevelloù all* gant Yann Mikael, 18,50 € franko, pep hini. Goulennit ouzh Yann Mikael 12 straed R. Giraud 44130 Blaen

Nedeleg laouen deoc'h holl, hag hor gwellañ hetoù evit ar bloavezh nevez a zeu : Levenez, yec'hed hag evurusted leizh ho ti!

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener *Kannadig Imbourc'h* : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X